

PAOTR E VOMBARD

(Yann Meur, Roazhon 2019)

Evit lâroust ar wirionez deoc’h, ‘vit ar wech tout on bet soner. Peogwir ur soner n’eo ket ken met paotr e vombard. Ur soner zo un den, peotramant unan yaouank, a glev, a selaou traoù a bep seurt, a zesk kanaouennoù, tonioù, a glask ober nê en dro, un den hag a zo beuñet barzh ur sevenadur. Ha pa oan yaouank oa alies kanerien kan ha diskan en dro din. ‘Blam’ da ma zad, oa dedenet forzh pegement gant ar c’han, kan ha diskan peotramant kan... kan a bep seurt, ma p’eus c’hoant, koa, e brehoneg pe e galleg. Du-mañ, ba’ du-mañ vize kanet papred, ga’ ma mamm, ma c’hoarezed ha ga’ ma zad eu, ha me (oa barzh eu).

Ha justamant, neuze, chañs m’eus bet d’aneo kanerien kan ha diskan ar C’hastell-Nevez. Ur wech (m’eus ket soñj met, m’eus ket soñj peogwir oan re vihan, daou vloaz hepken, met ma mamm n’eus kontet din) oan aet da Baris ga’ ma zad ha kanerien oa bet kaset ga’ ma zad da Baris evit ur fest-noz ba’ Paris, ba’r bloavezh eizh hag hanterkant. Ha pad an hent, hed an hent oa bet kanet ga’r ganerien. Ha me oa etrese ha ‘pad tout an hent d’hont deus ar C’hastell-Nevez bek Baris m’eus klevet kanañ ar-mod-se.



Kanerien ar C’hastell-Nevez, Issy les Moulineaux, 1958

Hag an eil gwech oa bet c’hoarve’et an dra-he din oa ugent vloaz goude, pa oan bet da Baris ‘sambles ga’ Yann Fañch Kemener hag unan kozh — unan kozh ‘vidomp pa oamp yaouank — deus ar strollad « Tro Blavezh ». Hag... memes mod, Yann Fañch hag ar c’haner kozh, ar-mod-se, n’a graet ken met kanañ ‘pad tout an hent ar-mod-se, koa.



Yann Fañch Kemener gant Eric Marchand, Printemps de Châteauneuf, 1977 (Foto Dédé Hellec)

Neuze, 'vit lâroust, on bet soner 'vit ar wech tout, ha soner on c'hoazh, deus familh vras ar soner on, ga' spered ar soner, sertainamant.



Ha 'benn ar fin, pa oan bet en dro da bemp pe c'hwec'h vloaz, m'eus ket soñj ken met m'eus kavet pipoioù, pipoioù kozh oa ba' burev ma zad. Peogwir ma zad oa bet soner eu. Ha gant ar pipoioù-se, unan gwenn hag unan du, m'eus komanaset da c'hoari forzh petra. Forzh petra, ar pipo ar-mod-se, dre ar penn ar-mod-se, hep lenn ar sonerezh na netra, met dre ar memor ; dre ar penn m'eus komañset da c'hoari gant ar pipoioù.

Ha dav eo lâroust ouspenn m'eus ane'et sonerien, sonerien m'eus ket ane'et nê kalz, peogwir ne vize ket alies deus ar re-se, met pa oan bihan aen d'ar festoù-noz, gant ma zud, koa. Ha ba'r festoù noz, 'lec'h oan pa oan bihan, oa bep taol Per Guillou, deus Karaez o soniñ gant unan all, hag an hini all oa deus C'hastell-Nevez justamamant, Yann Goas, deus ar C'hastell-Nevez, peotramant Jean-Claude Boedec, a oa eu deus ar C'hastell-Nevez. Hag an daou-se zo ket komper(ien) da Ber guillou, ar soner deus Karaez, ur soner brudet. Hag hemañ oa soner ha, peseurt mod, farder binvioù bombard ha binioù.



Pierre Guillou ha Yann Goas, Kastell-Nez, 1961

Ha neun m'a bet c'hoant, pa oan bihan tout, c'hoari ga'r pipo ar-mod-se hag... teue... dont a rae ur wech dre vare gavottenoù ba' ma fenn, ha neun oan dija, d'ar mare-se, ' c'hoari gavottenoù dre vras ma p'eus c'hoant.

Goude-se, pa oan bet daouezk vloaz, ma zad n'eus lâret e oa dav din mont da heuliañ staj Kendalc'h vize graet bep bloaz abaoe dek vloaz dija ba' ti skol ar merc'hed ba'r C'hastell-Nevez.

Ha ! bon ! Oan ket sur e vefen bet dedenet gant ar staj-se, met 'benn ar fin m'a lâret oan kontant d'hont d'ar staj-se ba' ti skol ar merc'hed neuze... oa tost-tre deus ma zi, koa, ma p'eus c'hoant. Ha d'ar-mare-se oa bet dav din prenañ ur vombard. Neuze ma zad n'a goulet ga' sonerien deus e gamaraded d'hont da Garaez, ganin, 'benn prenañ ur vombard din digant Per Guillou justamant. Hag an daou soner se oa lfig ar Berre, deut da gelenner a skol veur goude-se ha Raymond Moign deus ar C'hastell-Nevez.

Ha setu me ga' ur vombard nevez-flamm, hag ur vombard a oa uhel-tre. Ne oa ket en Ut met kentoc'h etre ar Ré hag an Ut. Ar pezh a zikouezh deoc'h e oa start-tre da c'hoari ga' unan all gant ar vombard-se, peogwir ne oa biniou ebet na bombard ebet evit 'n em akordiñ ga' ma hini.

Neuze on bet ba' staj Kendalc'h ba' C'hastell-Nevez ha m'eus desket ur bern traoù, skrivet barzh ul levr. Hag al levr-sr oa « Sonit ta Sonerion », skrivet, skrivet mat, ga' Polig Montjarret. An hanter deus an tonioù oa desket barzh ar staj-se ane'en nê, benn ar fin, peogwir m'a klevet nê ga kanerien deus ar C'hastell-Nevez, peotramant deus Poullaouen, deus an Uhelgoad, deus Speied, un tamm ba'partout, peogwir oan boas d'hont 'sambles ga ma zud da dout ar festoù-noz vize graet d'ar mare-se.

Ha 'vit larout un tammig muioc'h eo ret din lârou deoc'h oa deut ma zad prezidant ur strollad, « l'amicale », vize graet deus an dra-he, « deus ar menezioù du ». Hag an amikal-se oa mat-tre peogwir an Amikal a vode tout ar ganerien hag ar sonerien deus ar vro. Ha barzh oa ar merc'hed Goadeg, oa Paotred Morvan, oa Manuel Kerjean ha kanerien ar C'hastell-Nevez, Per Poher deus Landelo, Chan ha Marian deus Speied. Erfin, tout ar re-se oa barzh, ar re wellañ, ar re all ha tout ar re-he. Ha pep bloaz vize ur pred 'vit bodañ tout an dud-se, lakaat nê da zebriñ, ha goude oa ken... oa ken 'met ar gavotenn, kanioù a-boz ha tout ar jeu. Neuze m'eus anne'et tout ar re-se d'ar mare-se.



Emvod Amikal ar Meneiou Du, Plevin, 1966

Met ar merc'hed Goadec m'a anne'et unan deusoute pa oan yaouank 'walc'h peogwir oa unan deusoute oa chom ba'r C'hastell-Nevez, ba kêr Kerriou, war hent Speied ba' du-he.

Mod all, goude ar staj, peogwir ne gaven ket aezh da c'hoari gant ar vombard - anchennoù stard-tre da c'hoari gante oa bet roet din - stard oa ar jeu, ne blijte ket din 'benn ar fin ar beñveg-se ken diaezh da c'hoari gantañ. Ha lesket m'eus ar vombard ba' ma c'hamb, da vezañ gwelet ga pephini ma p'eus c'hoant, met ne serviche ket da netra din ken.

N'eo ken met tri pe bevar vloaz, tri lakaomp, warlerc'h, on bet 'n em lakaat en dro da c'hoari. Blam' betra ? Peogwir oa deut ur soner all, Reun Henry, deus Speied, dime'et ga' ur plac'h deus Speied, oa

deut da zebriñ ba' du-mañ. Oan ket ba'r gêr ha lâret n'eus da ma zad : « Bon ! Bin Yann, ma n'eus c'hoant, me zo c'hont sa zeskiñ dezhañ, 'benn lakaat neañ da vezañ soner. Peogwir d'ar mare se e oa dav da bep soner stummañ pemp soner all. Ar mod-se oa ar jeu d'ar mare-se. Hag hem' all n'a c'hoant ober an dra-he. Ha me vefe bet 'n hini kentañ.



Setu 'benn ar fin on bet kontant d'hont da welout anezhañ, ga' ma marc'h houarn, bek Speied, koa, 'vit gwelout neañ ha labourat 'sambles gantañ. Ha n'eus ket desket din soniñ gant ar vombard, peogwir ouien a-araok, met desket n'eus din ur bern traoù. Chelaou pladennoù kozh, sonerien gozh, sonerien deus ar re wellañ tout, Bodivit, tout ar re-se, koa. lakaet n'eus c'haoñ da zelaou ur bern traoù enrollet gantañ. Peogwir despun rae ur bern traoù ha neuhe oa moaien deskiñ d'ar re all — d'ar re yaouank lakaomp — an traoù, ar c'hanaouennoù, ar sonerezh n'a enrollet neañ, gant un UHER, ur son-enroller 'feson.



Bidan-Le Gall, 1910

Setu on chomet 'pad c'hwec'h miz da labourat 'sambles ga Reun Henry, ur soner mat-tre, 'feson. Ha m'eus desket ur bern traoù gantañ. Bep sadorn aen da Speied da welout neañ, simpa-tre oa. Hag ar-mod-se m'eus komañset, betek un devezh, barz'h un abardaezh ba' Landelo. Polig Montjarret ha Loeiz Ropars n'a savet ur fest-noz... ur fest-deiz, goude merenn, ur fest-deiz 'vit gounit, benn gounit arc'hant 'vit ar Secours Populaire Interceltique, ar SPI, 'vit kaout arc'hant evit pediñ re yaouank deus bro Iwerzhon norzh d'hont da ziskuizhañ ba' Breizh. Ha justamant ma zud, ba' ma familh, oa bet resevet ar-mod-se ur plac'h yaouank deus Derry hag unan all, deus Belfast oa deut d'ar C'hastell-Nevez i'e, koa. Ha, bez' oa bet graet neun ur fest-noz 'vit kaout arc'hant, blam' d'ar SPI.

Ha benn ar fin Loeiz Ropars n'a ket graet kement-se e labour peogwir n'a ket kavet kalz kanerien ha sonerien ma oa ket deusoute. Me' oan ket soner c'hoazh, kapab da lakaat an dud da zañsal. Soñj a rae din, soñj a rae din ' oan ket kapabl d'ober. C'hwezek vloaz oan d'ar mare-se. Ha pa n'eus gwelet Loeiz, hag a oa kamarad bras ga' ma zad hag e n'a ane'et c'haon mat-tre, pa n'eus gwelet oan ahe, zo deut da welout c'haon evit lâroust din-me :

- Bon ! C'hwi zo paotr Jorj Meur, c'hwi zo soner, sur.
- Bin, ya, bin, me lar, *non*, un tammig bihan... gwech ebet m'eus lakaet an dud da zañsal...
- O ! Met sur oc'h kapabl.

Benn ar fin, aet da soniñ ga' Loeiz Ropars, hon daou, ni hon daou, ur vombard ga' pephini, tamm biniou bet, koa.

Hag an deiz-se m'eus ouiet oan gouest da lakaat an dud da zañsal, ar ritm oa ganin. Setu peseurt mod on digoue'et soner.

Peseurt mod zo moaein bezañ soner en devezh a hirie ? N’eo ket normal, un dra souezhus, iskis eo, iskis-tre. Peseurt mod, en devezh a hirie, kavout daou soner ar-mod-se, unan gant ur vombard, unan all gant ur biniou ?



Le Meur-Toutous, Lisoù, Roazhon, 1975




Mich Toutous, 1974

Ken drôl eo m’eus c’hoant displegañ deoc’h ‘blam’ betra ha peseurt mod on deut da vezañ soner.

Ba’ ma yaouankiz m’eus bet chañs da gaout un amezeg, un den on bet ‘vit ar wech tout ba’r skol ‘sambles gantañ, Michel Toutous. Hag hemañ n’eus kroget gant ar vombard hag ar biniou pa oa-eñ c’hwezek vloaz. Ha ba’r skol oamp ‘sambles ba’l Likes, d’ar mare-se. Setu omp bet n’em lakaat asambles ‘vit labourat, dreist holl evit kompoziñ traoù nevez.

Blam’ oamp yaouank, yaouank flamm d’ar mare-se, ni n’a c’hoant da lakaat an traoù d’hont waraok. Ga’ tout ar pezh ouiemp, ar pezh m’amp klevet ba’r vro en dro deomp, koa, oa danvezh ‘vit lakaat ar sonerezh biniou-bombard d’hont un tammig pelloc’h ha lakaat ar sonerezh biniou-bombard da vezañ disheñvel deus par pezh oa bet graet a-raok. Setu blam’ betra m’eump kompozet ur bern tonioù gavotenn, ha tonioù gwerzioù, ha tonioù bale.

Deus ar soñj-se eo deut « Heuliadenn Bognol vras », un heuliadenn tonioù gavotenn graet en enor al lec’h-se, Bognol. Ha Bognol, ur gêr-se zo kavet ba’ Plone, etre Ar C’hastell-Nevez, Landelo ha Plone. Bognol, lec’h oa chom ur c’hamarad deomp a yae d’ar festoù noz d’ar mare-se, Rolland ar C’hilhieg, mab penn ar flied, paotred beg o zok, ma p’eus c’hoant, ba’r C’hastell-Nevez.



Pladenn Baron-Anneix ha Le Meur-Toutous, Arfolk, 1976



Yann Meur, 1977

Ha kompozet m’eump gwerzioù, neuze, « gwerz evit lakaat ar plac’h nevez da ouelañ », ha traoù all a bep seurt. ‘Pad tout ar bloavezh, bemdez vizemp ‘labourat ba’ ur sal klas, goude ar c’hentelioù ma p’eus c’hoant ba’l Likes, hon daou Michel ha me, oamp labourat evit krouiñ, sevel traoù nevez, tonioù gavotenn. Ha pa oan unan n’a kavet un dra bennag, e c’houle ga’ n hini all, ga’ eben ma p’eus c’hoant,

peseurt mod e kave ar pezh oa bet kompozet. Ha setu oa moaien eskemm ha kompoziñ traoù feson. Setu peseurt mod m'eump graet.

Ha goude m'eump prientet konkourioù, konkourioù, pas kalz, peogwir 'benn ar fin n'eus ket plijet re ar c'honkourioù deomp. Met benn ar fin omp deut benn da vezañ Kampion Breizh. Pa oamp triwec'h vloaz oa bet an eil plas deomp ha goude-se oa deut ar maout ganeomp.

Met goude m'eump bet c'hoant mont pelloc'h 'vit ar sonerezh, hag omp bet n'em zedeniñ gant ar c'hanaouennoù, gant ar c'han ma p'eus c'hoant. Ha me, dreist-holl, m'eus komañset da ganañ e brezhoneg. Ma mouezh n'eo ket re vat, neun ne oa ket aezh din, met evit ar stumm e yae mat an traoù, peogwir, 'vel m'eus displeget damaik, m'eus klevet 'vit ar wech tout kanerien o kanañ ba'r C'hastell-Nevez en dro din. Neuze m'eus ar stumm, gav din.



Gavotenn kanet ga' kanerien 'r C'hastell-Nez ba'n dañs, 1961. Lenaig ha Yann Meur ba' r penn

Ha goude-se oa bet krouet ganeomp ur gevredigezh... ur gevredigezh añvet an « Despunerien bro Dardou » . Hag an DBD zo bet ane'et blam' eo bet savet gate « Amzer Nevez ar C'hastell-Nevez », da lâroue eo Fest-deiz-Fest-noz ar sul Fask ba'r C'hastell-Nevez d'ar mare-se, ba'n hangar, ba' Penn ar Pont. Ba'r bloavezh seitek ha tri ugent oa bet savet FD-FN kentañ DBD. Ur fest-deiz meur, veur, ga' mil den. Evit ar mare-se oa kalzig a dud.


Hag an dud zo bet dedenet gant ar FD-FN peogwir m'amp bet c'hoant da bediñ ar re wellañ, ar re wellañ tout deus ar ganerien ha deus ar sonerien, 'vit ar mare, koa. Evel Paotred Morvan d'ar mare-se, 'vel Manuel Kerjean, Yann Fañch Kemener, Erik Marchand 'veljust, Bastard tad ha mab, teue deus bro Fisel, deus Kalanel resisoc'h, sonerien 'vel Jean-Louis ar Vagant, tud ar mod-se e kavemp mat-tre. Ha benn ar fin zo bet tud 'vit kavout ar sonj-se mat-tre hag an dra zo kaoz zo deut... oa deut tud deus partout, deus ar C'hastell-Nevez, deus kanton ar C'hastell-Nevez, sertanamant, met ivez deus partout.

Hag an Despunerien n'eus graet, 'vel lar he añv deoc'h, n'eus graet despunadegoù kanaouennoù. Ha goude-se omp bet [da] 'n em interesiñ gant ar yezh. Hag an dra-he zo kaoz oa bet krouet ur gazetenn dre ar gaoz.

Me m'a graet anaoudegezh ga'un den, ba' Laruen, un tammig uheloc'h 'vit Rostren ahe, ba' bro Plinn. Hag an den-se oa Reun Richard, o chom ba' Laruen, d'ar mare-se. Ha n'a lañset ga' tud all, Jean-Yves Philippe, Jean-Yves Thoraval, ur gaSetuig dre ar gaoz : « Kazetenn ar vro Plinn » vize graet deus ar gazetenn-se. Ha me m'a gwelet... me m'a kavet an dra-he dispar, ha soñj oa deut din ober memestra.

Setu ar pezh zo bet graet, da gentañ ga' « Keloù bro Dardoup ». Tri niverenn deus KBD oa bet graet, kaSetuigoù ma p'eus c'hoant. Ha goude oa bet krouet ga' re all deus an Uhelgoad, oa bet krouet « Kazetenn ar Menez ». Ha KAM teue maezh bep miz, koa, an dud oa koumanantet, a brene ur c'houmanant. Ha bep miz vize resevet ur gaSetuig ba'r ger. Ha ya : traoù 'bep seurt : kaozadennoù diwar-benn an traoù oa c'hoarve'et ba'r vro, kaozadennoù, ya, kanaouennoù, sonerezh, traoù a bep seurt. Memes mod 'vel ur gazetenn dre skrid, ma p'eus c'hoant.

KAZETENN AR MENEZ



ABONNEZ-VOUS! KOUMANANTIT!

12 numéros par an
6 numéros 120F
12 numéros 200F

12 niverenn ar bloavez
6 niverenn 120 kur
12 niverenn 200 kur

A adresser à : Da gas da :
KAZETENN AR MENEZ
Beur'hoat 29 218 BERRIEN
ou
9, rue J.M. Birien 29 119 CHATEAUNEUF du FAOU

Hag ar gazetenn-se zo moaien kavout ne'i barzh ar WebDoc Dardoup zo ba' Internet bremañ.

9
KAZETENN AR MENEZ

PEDALIOU
BA' PLAS AN TRAKTEURIOU
BA' LEMEZEG ?

Tu 1

Erik MARCHAND - Manuel KERJEAN ba' Fest-Noz ar C'hastell-Nevez : Ton dañs.
Nicole COLLCANAB : Al lenn ba' Lemezeg.
J.-Y. LE ROUX : Son Lemezeg.

Tu 2

Yann PUILHANDR : Ar vuhez ba'n toull gant an FLB-ARB (penad 1).
J. CITHAREL : Son Ker-Ys.
Mari FLOCH : Rimodell ar c'hatekiz.
Y. BERTHOU - I. POHO : Ton Gavotenn sonet ba' Boimeur.
Yean AUTRET : Kontadenn Yann Kroc'hennig (penad 1).
Ha toniou muzik ga' TOUSEG NIJ.

ECHU

NOTENNOU : Peseurt mod = penaos. **Blam' betra** = abalamour da betra = perak. **Ga'** = gant. **Ba'** = e. **Eu** = ivez. **D'hont** = da vont. **Aneo** = anavezout. **Buñet** = beuzet. **C'hoarve'et** = c'hoarvezet. **Etrese** = etreso.